

KANTIK SANT TEGONEG

Diskan

Deiz ho pardon, sant Tegoneg,
Ni deu d'ho pediñ kalonek,
Hon diwallit diouzh an dañjer,
Ha diouzh an droug e pep amzer.

1

E-touez ar gwez, war ribl ar stêr,
Ho chapelig a zo dister ;
Digant Doue, ermit santel,
Goulennit deomp kalon izel.

2

En ho chapel e red an dour ;
Kanañ a ra un hiboud flour,
Ma redo en hon ene,
Buhez kristen, gant gras Doue.

3

Patron karet, holl ni ho ped,
Mirit bepred ar Vretoned ;
Lakit enno doujañs Doue,
Ma vint dalc'hmat ho pugale.

4

Grit d'an tadoù ha d'ar mammoù,
Bezañ fidel d'o deverioù,
D'ar vugale bezañ sentus,
Evel m'eo bet o breur Jezuz.

5

Roit furnezh d'an dud yaouank,
An dañjerioù a zo ken stank ;
N'o lezit ket da vont da goll,
Dinerzh e-kreiz ar bed diroll.

6

Ha pa vo deuet eur an tremen,
Hor c'hasit holl en ho kichen,
En ho kichen, o patron mat,
D'ar baradoz da di an tad.

Refrain

Le jour de votre pardon, saint Thégonnec,
Nous venons vous prier de tout notre cœur,
Protégez-nous du danger,
Et du mal en tout temps.

1

Parmi les arbres, au bord de la rivière,
Votre chapelle est modeste ;
A Dieu, saint ermite,
Demandez pour nous un cœur humble.

2

Dans votre chapelle l'eau coule ;
Elle chante un doux murmure,
Pour que coule en notre âme,
La vie chrétienne, avec la grâce de Dieu.

3

Patron aimé, nous vous prions tous,
Gardez toujours les Bretons ;
Mettez en eux le respect de Dieu,
Pour qu'ils soient toujours vos enfants.

4

Faites que les pères et mères,
Soient fidèles à leurs devoirs,
Que les enfants soient obéissants,
Comme l'a été leur frère Jésus.

5

Donnez la sagesse aux jeunes gens,
Les dangers sont si nombreux ;
Ne les laissez pas se perdre,
Sans force dans le monde débauché.

6

Quand viendra l'heure du trépas,
Menez-nous tous près de vous,
A vos côtés, ô bon patron,
Au paradis à la maison du père.

(Skriver : Yann Reun Nihouarn, deus ar Rubihan - Tr : Lukian Kergoat).